

# CHANSON NEVEZ

*Var sujet glac'har ha tristidiguez daou den  
yaouaneck, demeus a baroz Speyet, prest da  
vervel gant ran-galon.*

Tud yaouaneck deus ma faros, didosted, me o ped,  
Da zilaou ar vuez u zo guenin erruet :  
Me zo eur serpent-major, tistrei deuz an armeio  
Rejouisset ma halon, o entreal bars ar vro.

Pa voan me partiet, da gommanç va c'honje,  
Moa losquet var ma lerc'h objet va c'harante,  
Moa losquet var ma lere'h, fleuren ar yaouankis,  
Evit mont d'ober eur c'hampagn, tressac ar guer a Baris.

Epad pevar biss anter, e zon bet e regiment,  
Hi neus gret va oll chagrin a va brassa tourmant,  
Bemnos a bep mintin, a pad an deis, aliez,  
Va speret o nijé betec ty va mestres.

Ma speret a nijé betec va bro beniguet,  
O sonjal a beb momet bars va amzer passee,  
C'hoarvezout a re guenin, e guis an durzunel :  
Pa ve collet ganti e far, a non dol da vervel.

Guenime, tud yaouank, c'hoarvese memes tra,  
Glae'haret bras a voan, o tont da bartia,  
Rannet o von ya c'halon, o toned d'hi c'huitad,  
Hi pa velas ac'hanon e devoa calonad.

Eis devez arog partial, visemp assambles hemde  
Ac eur sulvez d'abardaë, hi a lavaras din-me,  
An daelo n'hi daou lagat, hi moues entrecoupet :  
— Petra rin-me, deu yaouank, pa vec'hu partiet.

— Me ya da vont breman, da ober piaijen,  
Da faquat lloua e du va oll dillajou guen  
Evit ober caoa, da ma moja caret,  
Partiet evit a Republik, en deiou tremenet.

— Pa vec'hu erru n'ho regiment, me o ped va servicher,  
Da reï d'hin ho quehellou, raetal dre eur liser,  
Me a meus chagrin bras, gaud aon a v'ech casset,  
En tu al d'ar mor bras, guis d'ar vartolodet,

Ar blavez mil eis cant tri uguen a daouzeec,  
Da zèves gouel an Nedelec, a voan-me partiet,

485/A

H 74

Da zeves gouel an Nedelee, da zegueur deuz a noz,  
Pa voa ma c'hamaradet all o c'hont da repos.

Voan o vont da di va mestres, da laret dei quenavo.  
Hi pa velas a c'hanon a gommencas gwelo,  
— Arqa eta, den yaouank, moe'h o vont ar mes ar vro.  
Beuzet e zeo ma c'halon, en neur mor a zaëlo.

— Quenavo a larou d'och, quenavo ma mestres,  
Ben ar pevar pe pemp blos, n'hi n'hom gavo assembles.  
Hi a vouches din neuse, n'hi daou lagad an daëlo,  
Hae a coueas d'an douar, casi guis d'eou den maro.

Dan de quenta blas voan erru bars ar guer a Ruel,  
Ceto me serivas eur liser d'am mestrezic fidel ;  
Hi a respontas din, pevar deves gonde  
Penaos a voa clan, elan bras vor hi gouele.

— Mar na teut quet d'am c'honsoli, ma servicher fidel,  
Gand ar chagrin, ar glac'har, mie zo prest da vervel.  
Ho ! pebeus malheur evit eun den teuer da guitad he vro.  
Ho velet e vuia caret, bars toul dor ar maro.

Pa ven e faction, var ar meneion huel,  
Ma daou laguet a droe evar zu Breiz-Izel  
Ma daou laguet a droe, evar zu ty ma mestres,  
Mes na vellent netra, nemet eoajou aliez.

Deus ar mintin a gleven un nombr a lapousset  
A mouez ar rossignol, var bee ar veen pignet,  
Ar rossignol a laras din dre e vouez melodios :  
— Te ho c'heus ebars ar guer eur vestres earantesus.

— Eor vestres leun a c'hloac'har, a carguet a anken,  
Abaone e zoc'h partiet, o c'hober pinigen.  
Neuse a lavaras din, gand e vouez triomphant :  
Me gred e zoc'h glac'haret, couls ae'hi, soudard yaouank.

— Var ta dal he zeo merket, gand liou an dristidiguez.  
Penaos he zoc'h anquenet, o qritat da vestress.  
Neuze a zisquennas d'au traon da vodik, da vodik,  
Hae a teuas var ma scoa, d'a gana ar musik.

An eostie a laras din, gand e vouez triomphant :  
— Me a vezo fidel d'och queit ema vec'h no regiment :  
— Arqa eta, eonic bian, mar vec'h din ken fidel,  
Ez a iello evidon, da vetec Breis-Izel.

Ben arc'hoas mintin, querquent vel ma vo seler,  
Te a teuio d'am c'hamp, da guerc'hat eur lizer.

Hanter nos mintin, n'a voa quet seler an de,  
Me glevas ma messager ; var ma frenes o cane.

Lavaret a re din neuse dre e ganaouen :  
— Roet din ar paper, ma partilu soudan.  
— Kerz eta, eostic bian, da ziou esquel digoret,  
A quemeret an hent da vonet da Speyet.

Neur errui bars ar vro te hei da dy ma mestres,  
Ac a commenso cana e quichén e frenes,  
Te a lavaro del penaus vec'h digasset,  
Deus ar guer a Baris, gant e muia caret.

Dan heur an anter nos, erruas an eostic.  
Da hont en digor digand ma mestresic :  
— Plac'h yaouank, emezan, digoret din an or  
Me zo digasset aman, gant ma sergeant-major.

— An den yaouank-se, herves a meus elevet,  
A zo choazet gand Douc, vit bea da briet,  
Cetu aman eur liser a nens roet din-me,  
Me in da bartial breman, da gonta dezan o toare

Ar blaves mil eis eant tri-ugen a c'houesec,  
Ministr ar brezel en devoa decidet,  
Ministr ar brezel en devoa decidet  
A veze bet liberet tout ar blavez unec.

Da ma mestres ractal, a serivaz our lizer,  
Evi annonc dezzi a voan erru dar guer.  
— Arça eta, plac'h yaouank, a lavaren dezzi,  
Quemeret da joaüstud a quited da enni.

Dan decved a vis du, a voan me partied,  
Deus ar guer a Baris, vit va bro beniguet.  
Nense a tensc soie'h din na demens ma mestres.  
Evit un den yaouank pebens plijadnres.

Neur errui bars ar vro ezon et d'y gueillet ;  
Neur entreal bars an ty dezy voan non adresset :  
— Bonjour doc'h, ma mestres, cetu me bars ar vro,  
Erru on gand joaüsted, da laquat fin do catio.

— Laquet breman e tu an dillajon pa gret  
Laquei lloa e du, pa voan me partiet,  
Laqueet breman o torn, c'hani o servicher,  
Ma vesimp-ni unisset ar rest deus on amzer.

— Cetu aman eur seien, evit fin deus or yaouankis,  
A meus digasset doc'h, deus a guer a Baris,  
Conservit anezi, gand o coalen arc'hant,  
Quen a iessemp on daou ous tol ar sacramant.

— François ques, va servicher, t'eme ar plac'h, neuse,  
Na momp quet ar bonheur d'errui bars ar point se  
Or e'herent o deuz chenchet aboue zoc'h partjet,  
Ny eo an daou malheurossa zo gant Doue crouet.

— Ma mestres ! ma mestres ! ! nam zisconsolet quis,  
Car me a meus eur galon a zo tener meurbet,  
Me zo eun den yaouank, tistrei deus ar armeto,  
A meus souffret dejá nombr a dourmancho.

— Mes ebars va oll chagrin me a nom gosome,  
Pa teue song din a c'hanoc'h va dous, va c'harante,  
A breman, va mestres, ma vesemp separer,  
Gand eur bared avel, me a vo disare!

— A possobl a ve eta, a mellemp meritet,  
Deus a heurs or e'herent, un dra quer cri meurbet,  
Deus guenin-me dan illis, bezemp on deou fidel,  
Iamp d'ober or bromesse, dirag en Aviel.

— Neuse ni bedo Doue, ac e Vam beniguet,  
Da rei da dout or e'herent, sclerigen var ar sujet  
Demeus ar bromesse a mump ny on daou gret  
Da yevi assembles, queit a vimp var ar bed.

— Arqa eta, den yaouank, me guemer eur loden,  
Demeus o c'hol chagrin, a demeus o c'hanken,  
Breman vellan ervad, demeus o propojo,  
Evit on separer, neus nemet ar maro.

— Et breman dar guer, a me la ive,  
Ac informomp or sud, deus bolonte Doue,  
A ben dissul d'abardaë, dan heur goude creis-le,  
N'y nom gavo assembles da gonty on doare.

— N'y nom gavo assembles lec'h a mump gouennel  
Sclerigen digand Doue, ac e Vam beniguet,  
Laromp breman eor Baler rog nom sisparia.  
Quenavo ta, ma mestres, queno dissul guenta.

#### An'den yaouank errui bars ty e dad.

— Arqa eta va sad quez, silaouit va feden,  
Me ia d'espliqua doc'h breman va flaneden,  
Me ia da lavaret d'och gr pes so erruet,  
Ac ar pes a bonez bemde var ma speret.

— C'houec'h vlas so tremenet aboue pardon ar C'hian,  
Voa goneet va c'halon, gand eur plac'hie yaouank ;  
Gant e'hamaradezet, moa guellez anezzi,  
Charmet doa ya c'halon, gonezet a voa ganty.

— An eil gueeh ma y guellis vos bars illis Sant-Por,  
Daoulinet ebars ar c'hoer, vis-a-vis dan autér,  
Eno pa moa y guellet neuze a moa songet  
Penaus a vos uo elez deus an en disquennet.

— Pa vos echnu an overen, vos deut'mes an illis  
D'y gortos bars ar verred, goude fin an offiç,  
Pa vos o sortis ar mes deus ar porchet  
Me zirijas ma fojou vit monet d'y c'havet.

— Bonjour d'oech plahik yaouank, rouancs an douar,  
Ebars ar Finister, na velfen quet o par,  
Goneet eo ma c'halon guenoc'h plahik, yaouank,  
Lavarel din, me o ped, breman o sentiment.

— Choui ez eo, den yaouank, au hini a garan,  
N'eus nemedoe'h d'am iaquat eurus bars er bed-man,  
Ma c'halonik a vos guenoc'h gon'zet,  
Aboue ar c'henta guec'h, ma guenoc'h parlantet.

— Mar vesimp separat, me vo ar maliennrussa  
A zo bet gand Done crouet bars er bed-ma,  
Rae se, c'la, or sud ques, designomp on deves,  
Vit n'a erruflomp tout da bariant assemblies,  
C'hoant bras a mump on daou da vea priejo,  
Evit gallout nom garout, tre betec ar maro.

### Respont dan daou den yaouank

— Area'ta, daou den yaouank, n'y a deus o maguet,  
Ac evit dimezi or d'honje na po quet,  
Ny na gredomp birviquen 'zo'ch galvet gant Done,  
Car na neus evidoc'h, noalc'h, a fidelite.

### An daou den yaouank d'ho c'herent

— Ben dissul quenta, epad an overen,  
Equis domp ni ou daou, goulennuit selerigen,  
Evar ar garantez a zo e n'or c'halou,  
Ac a pezo respont deus on affection.

— Na dent quet da gontraria diou garantez parfait,  
Pere varvo gant gliechar mar viot dispartiet,  
Ny a teu do pedi da rei domp o conje,  
Ma vezog ret er bed man, pes zo laquet gant Done.

### Respont dan daou den yaouank

— Ioutil ezeo doc'h, insisti davantach,  
Unan zhaooc'h hei da gosent an ini al da sconlach,  
Noc'h quet galvet gant Done da vea unisset,  
Rae-se eta, daou den yaouank, rak-se nom separat.

### An den yaouank de guerent

— Area eta, va oll guerent, me ia da lavaret ;  
Rana a ret ma c'halon, troublé ret ma speret,  
Me la da lavaret d'och, quenavo ! quenavo !  
Varc'hoas pe darzo an de, me a vez maro !!!

### An den yaouank rencontras e vestres

Don heur goudre creiste, me gavas va mestres,  
A hy glaharet bras a leun a dristidigues,  
— Autron Doue, den yaonank, o pébeus planedes.  
Rannet ezeo ma c'halon, sionas gand an anken.  
Oh ! querent malheurus, c'houf a pe ar galon,  
Da lezel dnou den yaouank, da verval gant ran-galon.

### An daou den yaouank d'ho c'herent

— Preparet o tillat eaou, aben are'hoas vintin  
Ny a vo cavet maro, dindan ar veen ivin  
A zo quiehen an illis, e cornig ar verred  
A dindan pehini, ny a vo interret  
Laquet a hanomp, me o ped, dindan ar memes be.  
Evit ma yellomp assemblies, hed a eternité ! Amen !!

FRANÇOIS RUPPE.

## CHANSON NEVEZ

*Vour sujet ar gonscrivet yaouank demeus ar  
blaves mil eis cant uneec a tri-uguen*

*Domine potentissime da Iuminem mihi  
Me oped ta, va Doue, dont dam sclerigen  
Evit ma hallin discleria va huez tremenet  
Ac ar poanion da bere, siouas, e zon sujet.*

Digorit o tlou seouar, silaouit un den yaouank  
Pehini neus quitted e vrø, ar blaves-man presant  
Ar blaves mil eis cant daouzez a triogen  
Dar bemp var nuguent an vis kersu, vit rel doc'h da gomprea.

An deis-se deus ar mittin, voa deut an ordrenanç  
Da bartial dan dregon, evit ar republik Frang  
Cetu ar gonscrivet yaouank, oll voa glac'haret,  
O elevet ar hellon-se, o c'halon voa rannet.

Obliget da guitad, ho c'herent ho mignonnet,  
Ho sadou, ho mamou, ho breuder, ho c'horazet,  
Var ma feillen voa merket ar c'homso cri a cruel :  
« Punisset a vec'h, mar vauket d'an appel. »

O vellet ar c'homzou-se, va c'halon voa rannel  
Au dour a zirede demeus ve daou laguer.  
Cetu me partiet, dan dregon deus ar mis  
Hirio mon e mont Valérien, ost ar guer a Baris

Non quet aman va hunan, o souffri tourmancho  
Pevar all azo c'hoss, pere zo denz ma bro  
Evar sujet da bere meus c'hoant da harlanta  
Car pevar soudard ezint, d'emeus ar vaillanta.

Bemnos nom reouissomp, arog mon da gousket  
Or c'halon ra met unau, pa vemp reouisset ;  
Nense a harlantomp deus ar plujadurezo  
A misemp ebars ar guer, gand or c'hamarado.

Pa lejomp da bournmen, teue caus deus ar vro.  
Gand daelo on daou lagat, a c'hibem an encho.  
Evel an druzunel kes, collet ganty e far  
Pini nom dol da verval, ractai var an douar.

Pa jonjan em sad, em mam, pere nens va maguet  
Hac ebars au ty eurus, lec'h ma zon bet ganet,  
Neuse a ven scoet a disconsalation  
Ac eguis un tol lanc, a dreus din ma c'halon.

Pa teu ebars va memor, an amzer meus passeet,  
Gant ma c'hamaradet a ma c'hamaradezet  
Deus pere alias !!! alias !!! ezon, separet hirio  
Palec'h ezeo et eta, ar plijadureso

Mump tanveet assembles, couls an nos vel an de ;  
Cetu ar pes e basse dre va speret, bemde ;  
Ma mestres, ma mestres, aman var ma chanson  
Me a num recommand doc'h, deus a greis va c'halon

Songit bars an hini o car, pehini zo an arme  
Prest da vont an disesper, o hortos e gouge.  
Bremen zo pevar blos a voan en ho quichen.  
Ac an an deis a hirio mon evar leign eun duchen.

Evar leigu eur menez, faq dar seis sort amzer,  
Ust ar guer capital Franç, mon o souffri miser.  
Divar leigu an duchen-man dolau vechou ma zello  
Evar su ma bro natal, mais nitra na vellon

Nemet ar firmamant pehini zo ust or pen,  
Ac an eol sautel ra deomp ar selerigen,  
Deus an nos a vellon choas ar loar ne ar sterret  
Pere contemplon bemnos, arog mont da gousket,

Demeus selerigen pere pa voan ebars ar vro  
A profiten vit monet d'ober pourmenadeno.

Cetuz aze souvenirou, a zo eri a cruel ;  
Bet truez ous o pugale, tadow mamou sante!.

Querent ha mignonet, na ouifsec'h quet compren  
Ar mizeriou a souffromp aman var an duchen,  
Dar poasiou ar brassa ezer sujet bemde,  
Obliget d'ober faction, couls an nos vel an de.

Gant ar sac'h var o chouq, o fasni o sabren,  
Ac evit nom reposi neus nemet eur planken.  
Hienes a zo eur guele a zo yen a kalet  
Evit reposi eur chorff paour pehiu! ve scornet.

O tont deus ober faction, dre a gloao pe an avel  
A glever, epad an nos, dre o tiou seouarn o yudel.  
Mar vise lavaret din, bremen sod daounguen mis  
Visen bet quen malheurus o tronen va yaoukis

Me mise pedet Doue, da dori va flanedan  
Mais pa zeo digoet guenin, ez eo ret din y douguen  
Ac ebars fin va c'honge martese vo bresel  
Neuse neur vro estranjor, martese vo ret mervel,  
Songit ta, iud yaouank, peguen trist ye ar maro,  
Mervel da bemp bla varnuguen, e creis tan ar c'hanonion.

Mar ia ar c'hellou d'ar guer da laret vin maro,  
Laquet guenin, me o ped, un nanbeut pedenno,  
A neuse e bars ar vro, evel e ma ar c'his  
Choullan guenoc'h en *Uatet*, pe un *De profundis* !

Mont a ran, va mignonet, bremen da echui  
Re gloac'haret eo va c'halon vit galout continu  
Mais quen evit finissa, meus c'hoant da lavaret  
Hano ar pevar den yaouank, deus pere mens parlantet

Unan a zo e hano, Jacques Bourriquen  
An eil demeus ane, e zeo Even Gourlaouen  
Isidor Maisonneuve, a Corentin Lagadee,  
An hini-diveza zo deus Carais, an tri al deus Speyet.

Mar moe'h clasq gout a elevet, piou neus gret ar chanson,  
Ma bars ar guer a Baris, canuet e zeo e galon,  
Sergent-major e zeo, demeus ar blavec uneec  
E hano zo François Ruppe, demeus bourg Speyet

Bremen or pemp assemblees, or sperat bars ar vro  
A laromp dar Fiuister, quenavo !! quenavo !!!

FRANCOIS RUPPE.

FIN

